

Deut on da bedi swar ar roz, autographe
 Da bedi ha d' ober eur poz;
 Goude pedi me ra eur sell
 Star ar c' horn mañ a Kreiz - Izel;
 Bolz was an oabl 'zo dispak staler,
 Heol mezeven 'goue plomm ha taer.
 Peter wrelan 'rez Bourg Herien?
 Ar falc'herien!

Pemp pott distreiz ya gant ar prad,
 Lomm d'o c' troc'hen, berrit o gavad;
 Korf o roched swar an troc'h flour,
 O falc'h a lugern vel melour;
 Pemp korf a blant al laonenn dir
 E Kreiz ar foen hep laret gir,
 Hag ar pemp pott, sel pemp balans
 A glask o lens.

Pemp korf a dro swar an diuekar
 O teul seul gwech yeot d' an douar;
 Ar pemp led hirr dalc'h da vouctat
 Ar falc'herien, da luskellat;
 Bep ma koue ar foen swar e hed
 Paou foener her stlap hag her led
 An nijader zo berr, allaz!
 'Nz d'ar prad glaz!

Bep an amzer ve gret sav kein,
 Ha me glev neuze trouz ar mein
 O kregichal vel kegined
 An dorn zo primm, ma mignoned,
 Adnevet e ar varvenn,
 Eun tamm di-han dan an tlevenn;
 Setu pemp laonenn c' hoaz da skei
 E mest ar sei.

Hag e garo gwelet ar foen
 Ken disourxi ha ken labourenn,
 Karget a gan, karget a vleun,
 O tout d'an traon a doliou leun;
 Ia, an dolen ze zo garo.

Groebet skubet garet ar maro
Foer flour e dremm velt merc'h yaouank,
Ha garet stont!

An ezenn o tremen swarnan
Hen lake mistri da wragenman,
Mez bep ma sko ar falc'herien
E paouez lustell bras ar foer
E liou breman, zo liou ar gaon
Hannal ouz den aet da anaon,
Ar foer d' e dro zo vel an dud,
N' e hed ha mui.

Na peter a sav tro-war-dro?
G'houez vat ar prad o vale bro
Hag ezenn vat ar c'horn bulun
O nifal stann-vel'k vit lutun;
Ar falc'herien, 'sell o labour
Eus peb hini tizer an douer
Eost ar vrutailh ya plomm d' ar Kroc'h
Bet e zo bec'h!

Sec'het, foer dou, ha sec'het aez,
Ema ar foener bras ermaez!
Ar gaon war huez, ezomm ar foer
Erit ar bio hag an ouer.
Deuet karr bras, tapet ho samm
Gant bod an hent lezet e damm,
Foernek al leur zo paket mat,
Endr d' ar prad!

Mar karet, vit achu ma zon
Gwrionps ar gentel gant an ton:
Eur falc'her dall zo dre ar bed
O skei a dreuz, o skei a hed,
Deiz pe deiz ni vo dis karet,
Hadet ar c'horf paour er vered;
Graf d' an ine da vont tinad,
Da di hon Zud!

Mal - Sulon
/Serien - San Sonaz
29 Mezeven - 2 miz ar foer 1946